

Dom Iann Derrien.

Pa Dom Iann Derrien da gousket (1)
Gand an naon eo bet difunet

 Maria —

Gand an naon

O skein tri zol war he wele :
Dom Iann Derrien, kousket oud-e ?

Oh ne on ket a zra çerten :
Petra vank d'ec'h u Iann Derrien ?

Petra vank d'ec'h er c'houlz-ma noz
Pe man pep tra holl o repos ?

Ma eo ho mamm, Dom Iann Derrien,
' Zo aman c'h' ober pinijen

' Zo ch' ober pinijen garo,
Siouaz ! aboue ez eo maro

Pa oan e bue war ar bed
Am boa da Zoue prometet

Mont eur vech da di Otro St Iann
ha da St Gervest Allemang.

Mes gand ar marv on surprenet
ha ne m'euz ket gallet monet (Maria)
Dom Iann, c'houi hello mar keret.

Dom Iann Derrien a lavare,
D'he choar Mari, tri de goude.

Eur veac'h m'euz antreprenet
Ma c'hoar, hag e renkann monet.

Monet eur vech da di St Iann
ha da St Gelvestr Allemang.

Pa oan e bue war ar bed
E doa da Zoue prometet.

Gand ar Maro eo surprenet
ha ne deuz ket gallet monet

*Maria, et le dernier vers se répètent.
Il n'y a point de répétition dans les couplets
où il y a trois vers.*

he c'hoar Mari a lavare
Da Dom Iann Derrien p'hen c'hleve.

Ma vije ouz-in e sentjac'h
Vije kas kannad e rajac'h.

Kannaded sur ne gasinn ket,
Me ma-unan renko monet.

Pa arruaz e bord an nod
Kavaz eur batimant war flod

Na mestr al lestr, lerit-hu d'in
ha c'houi em c'hemerfe n'ho ti ?

Evit ma c'has da di St-Iann
ha da St Gelvestr Allemang (Maria)
D'ober eur veach vit ma mamm.

ha pa vinn me arru eno
Mestr al lestr, m'ho rekompanso.

Pa oant war ar mor ambarket
Ar Mestr al lestr en deuz laret.

Pachic, pachic, ma fach bian,
Te zo dilijant ha buan :

Ping da vek ar wern huelan
Da chout pelec'h ez omp aman.

Ar pachic bian lavare
War bont al lestr pa ziskenne

Huelan ma hellen on bet
Na netra n'am euz bet gwelet (Maria)
Nemet taer lestr hag hi gwerniet.

Nemet taer lestr ha hi gwerniet
Me meuz aon ez int Moroet

Ar Moro braz a lavare
D'ar Mestr al lestr p'hen salude.

Na Mestr al lestr, larez-te din
Petra e t'euz kuzet n'ez ti ?

Na n'eo ar paour Dom lann Derrien
' Zo aze c'hober piniijen.

Oc'h ober piniijen garo
Evit he vamm a zo maro

Ar Moro braz a lavare
Da Dom lann pa hen salude :

Dom lann Derrien, lavar d'in-me,
Te lesfe da voned karre ?

Well ve gan-en koll va bue
' Vit kuitat ma boned karre

Da Zoue am boa prometet
Ma boned ne guitajenn ket.

Ar Moro braz p'en deuz klevet
' Barz ar mor ken deuz-han tolet (Maria)
Da zibri gand ar moroc'hed.

War eur garrek eo arruet,
Eno ez eo bet preservet

Eur batimant 'zo tremenet
Ar verdidi n'euz han gwelet (Maria)
Da vestr al lestr ho deuz laret :

Duont a zo eun den manet,
Troomp hon bark, demp d'hen c'havet.

Eur mouchouer a zo gant-han
Evit sin da vont da vit han

Dom lann Derrien a lavare
D'ar Mestr al lestr p'hen salude

Zeiz de zo m'euz ho kuitaet
ha zeiz ofern am euz laret (Maria)
ha zeiz anaon m'euz delivret.

Chetu aze eur mouchouer
Kasit-han d'am c'hoar vad d'ar ger.

Laret, n'ei ket d'ar waz gant han :
Goad hon Zalver a zo enn-han.

Eman enn-han ar Vadeiant
An nouen hag ar Zakramant.

Chetu aze eur mouchoer
Diant Dom lann Derrien ho preur.

Ne re ganit ket anez-han
Rak goad hon Zalver zo enn-han.

he c'hoar Mari n'euz ket kredet
ha d'hen c'hannan ez eo bet et.

Tal ar waz paz eo arruet
hen c'hannan n'e deuz ket gallet (Maria)
Rak ar waz a oa dizec'het.

écriture de Kerambrun.

(1) *Ce vers est ainsi écrit dans le ms.*

(2) *Le fol. 154 verso est paginé 2 par Penguern ; le fol. 155 recto, paginé 3 ;
le fol. 155 v., paginé 4.*